

niv. 25
Gwengolo
2003

ROUZIC



Ar veaj
Laboused el liorz
Lanig Lagadall
Dizolo gant Telo

LABOUZED EL LIORZH



Ar pennduig

Ul labous brav-tre eo, kalz liv warnañ. E-pad ar goañv e c'hellez hoalañ anezhañ en ur stagañ boullou greun pe druzoni ouzh ar gwez.



An dred

Bevañ a ra dre strolladoù : a-wechoù ez eus meur a vil labous er memes strollad. Sod eo gant ar frouezh, ar fiez dreist-holl.



Ar boc'hruzic

Ul labous boas eo, a gustum klask e voued e rez an douar. En e gan e tistag “ buuzhug, buuzhug, braas, braas ”.



© Fred LAVAIL

Ar rouzegon

Ul labous lontek-kenañ eo. Padal eo aonik-tre : kuzhet mat eo he neizh.



An eostig-bailh

Ul labous divroer eo. Staliañ a ra he neizh e foñs ur gleuzenn : en ur wezenn, en ur voger... pe en ur pod bleunioù.



Ar voualc'h

Ar “voualc'h beg melen” a lavar “ Kig ha bara louet, hennezh eo va boued ! ”. Kalz outo a zo el liorzhoù. Ma lakez greun dirak da di, e weli unan moarvat.



Ar golvan

Ar golvan-boutin a zo boaz da vevañ el liorzhoù. Ul labous annezher eo. Staliañ a ra e neizh n'eus forzh pelec'h, ha debriñ a ra n'eus forzh petra.